

(322, suite)

D'an Autrou La Cross,
 Deputé eus ar Finistèr,
 var e eruidigez e Brest,
 Goude un duel en devoa bet e Paris.

(323)

Gergent vel ma vouezis e voac'h bet drouceurus
 Bars en un action deus ho pers gloriüs,
 Va c'halon vae schlaset meurbet gant ar chaigrin,
 O teport da betra vijec'h deut d'ar parfin;
 Mes souden assuret var yec'het eur mab maed,
 En devoa gant enor venjet memor e dad,
 E trugarecais Doue deus a greiz va c'halon,
 Da veza miret deomp hon Deputé Breton.
 Hirio rentet en Brest, etoues ho mignonet,
 Deurvezit din, Autrou, gant Breizis da zonet
 Da offri dec'h va hommach, vel eur quier quenvroat,
 Pini sant en e greiz o sailla e oll goad
 Pa voar e zeo eurus nep er merit beza,
 Hac en deus feurgarguet un dever ar c'haera.
 Va c'hredit, me ho ped, autrou, e peb amzer,
 Gant an oll Vretonet ho leal serricher.
 (Lédan).

(Vol. VI, p. 322-323.)